

AR VRO

KELAOUENGELCH
MIZIEK



Priz : Daou Wennek

Eur bloaz koumanant : C'houec'h real.
Gant « AR BOBL » en tu-all : Ugent real.

Paëroniez "AR VRO"

An Aotrou 'N Eskop DUBOURG. — An Aotrou Markiz ha Kannad AN ESTOURBEILLON. — An Aotrou Kannad LAMY. — An Aotrou Kannad HEMON. — An Aotrou Markiz FREDERIK A GEROUARTZ. — An Aotrou Drouiz IAN AR FUSTEK, "AB GWILLERM" — An Itron Enorus MOSHER. — An Itron Enorus ANNA A GERVENOAEL. — An Dimezelled Enorus NATHALI ha MAC'HARIT DE VOLZ-QUERHOËNT.

Hanoiou Skrivanieren "AR VRO"

Iez Gwened. — Blei Lannvau. — Bleimor. — Kelen Glaz. — Eflam Koet-Skau. — Job en Drouz-Vor. — Loeiz Herrieu (Barh labourer). — Pengleuik.

Iez K. L. T. — Jos Albaret. — An Arc'hantek. — Armel. — Ar Berr (Abalor). — Bruk. — Ar Bruger. — Charlez Ar Braz. — Barz ar Blawez. — (ar Yeodet) Bocher. — Biler (Azenor). — Berthou (Alc'houeder). — Barzik Kerlaz. — Ar C'hozik. — Ar C'horfek. — Ar C'harget. — Louisa Charran. — An Du. — Doph an Ti-all. — Evnik Arvor. — Esnault. — Even. — Ian Ar Fustek. — Ar Furcher. — Ar Garrek. — Ar Goffik. — Ar Gall. — Loeiz Gourlet. — Ar Gak. — Godest. — Gwennou. — H. Gwillerm. — Gouriou. — Glazardik ar Bod-dero. — Leon Ar Gourenner. — Eflam An Henoret. — Jaffrennou (Taldir). — Kerniliz. — Lunedek. — Laouik. — Meriadek. — Ar May. — L. Ar Menn. — Meliaf. — Ian Naden. — Pennhouarn. — Ch. Picquenard (Barz Melen). — Loiz Ar Roz. — Loiz Porzikel. — Potr Ar C'hap. — Klaoda Ar Prat. — Per Pronost (Barz Treflez). — J. Ar Pelleter. — Iouen Poullan. — Renan Ar Rouz. — Jord Ar Rumeur (Mathaliz). — Ian Roudot (Mel-oc'h-dir). — Anna-Mari Ropars. — Erwan Sebillot. — Ar Sevellek. — Tiercelin. — Iannik Ar Venaër. — F. Vallée (Ab Hervé).

AR VRO

Penn-Rener : FANCH JAFFRENNOU " TALDIR "

« Kaz an den ha na gar ar Vro a vag anezan »
(Sant KADO)

K R E N N A D

Ar Brezonek koz, TALDIR. — *Pichik Marigoroc'hen*, AN HENORET. — *Pell a Vreih-Izel!* Eflam KOED-SKAU. — *An Nevez Amzer*, A. M. R. — *Ar Goulmik hag ar Marmouz*, AR VENAER. — *Klemmou ar Breizad divroet*, L. CHARRAN. — *Eostik ha Turzunel*, EVNIK ARVOR. — *Eflam Kerzenan ha Mac'haridik*, AN HENORET. — *Ar wazik-dour*, POTR AR C'HAP. — *An aluzen*, DOPH AN TI-ALL. — *Leortennadur*, etc.

AR BREZONEK KOZ

Ar pennad-ma zo distaget diver eur skrid digaset d'eomp divar benn ar brezonek.

« Ar brezonek ne ma ket da ober. Great eo, a bell-zo, ha great a zoare. D'ar poent a ma oamp-ni c'hoaz o redek e skouarn ar c'had e Menez-Are, e klevet ama! brezonek deuz ar c'houeka. Hag e kredfemp ni ober an neuz da zevel, da ivanti eur iez er c'hiz-nevez! An hini goz, an hini hon deudsket var barlenn hor mam, da hounnez, ha n'eo ket d'eun all, eo derc'hel.

« Ma lavaret gwechall :

« Ne c'heller ket siwaz nevezi
« Tal eur plac'h koant vel tal eun ti. »

« Hor iez karet ne c'hoarvez ket ganthi vel gant gened ar bed-ma, ne gosa tam. He zal a chom bepred diroufen, fresk ha livet kaer he divoc'h, skiltr ha flour he mouez. Iaouankaat ha koantaat bemdez eo a ra; hag, a drugarez Doue, evel eur bennerez, madou d'ei eleiz, e vev brao deuz he leve. Ezom ebed ne deuz da c'houlouen aluzen na digant ar Saozon na digant ar C'hallaoued.

« Enor eta d'ar Brezonek, ia d'ar Brezonek dibouloud ha digatar! »

Mad tre, mad tre, evelse just e komzomp-ni ive, ar Varzed, red eo derc'hel mad, heb souza na kila tam, d'ar iez bet disket d'eomp en hon bugaleach. Mez diwallomp, eno e ma ar skoill, da chom ive bugale en eur gozeal ha dreist-holl en eur skriva. Diwallomp na leverfer ouzomp hon deuz miret mad eur iez hag a zo gouest da drei sonjezonou eur bobl babik, mez a zo imposubl d'ezhi sevel uhelloc'h ha dizrenvel mennoziou tud en oad.

Lavaret a rit, Kenvroad enorus, n'hoc'h euz ezom aluzen ebed na digant Saoz na digant Gall: holla, aze e talc'han ac'hanoc'h a zao: n'ê ket gwir. Mar fell d'eoc'h miret ar brezonek evel ma ve komzet koulz en Menez-Are evel en Mene-Du, evit c'houi a renko sur digemer meur a c'hir gallek, evel madou *spirituel* ha *temporel*!! Hag evelse o klask harz divar eur skoasel danjirus (sevel giriou nevez) c'houi a gouezo var o fri en eur poull danjirusoc'h c'hoaz (kaout eur iez bastardet.)

Nan, ar wirionez, evel ma leverer aliez, a zo etre daou, hag ama ema kont evelse ive.

Arabad eo *kroui* giriou nevez a bejou hag a dammou, heb komprenezon, heb gwiziegez, heb anaout ijin ar iez hag he c'halloud, mez na fell ket souza kenneubeud dirag giriou brezonek nevez, ma vent eskerniet mad, elec'h breina ar brezonek gant gallegachou, gouzout renka, ficha ha kempenna, setu petra hon euz da ziski ober evid ar Brezonek: eur wech an

amzer, eun tam bennag euz eur c'horn voger a vezo da adober tre ha tre, mar deo re skalfet : arabad a vezo chom heb ober, pe an ti a wanto en e boull.

Hag evid kloza eun disput bet re hir dija, lavaromp kement-ma : daou Vrezonek a zo hag a dle beza, evel ma zo daou sort gallek, dacu sort saosnek, daou sort keumraek : an hini poblus, an hini a gomzer bemdez ; hag an hini gwiziek, an hini a skriver hag a brezeger. Evelse ema kont dre-holl, en Breiz evel e lec'h all.

TALDIR.

PICHIK MARIGOROC'HEN

Diou vilin. Daou veliner... Dishenvel an eil ouz egile, evel m'eo an noz deuz an de... Unan Erwan Ar Braz, egile Jakez Marigoroc'hén.

Milin Erwan Ar Braz a oa koant ha zeder, en mesk ar gwe braz, an dour a glemme laouen, o koueza var rod ar vilin, an artijen a zirede deuz ar pevar c'horn ar vro, ha bemde a welet, heb paouez, ezen ha kezeg, zammet ar valad eno, o c'hortoz bea dizammet.

En pad an de na glevet nemet mouez ar velinerien, trouz ar vilin o vala, an dour o koueza var bannou ar rod vraz gant eun drouz du-diuz...

Milin Lezvaëz a oa eun ti a blijadur, ar perc'hennou, tud a faëson... Ar peuc'h a galon a gustum lakat an den evuruz.

Bepred laouen, Erwan Ar Braz ha Marianna a veve evuruz, en o melin. — Bet o devoa eun amzer a chanz fall, tri deuz o bugale oa eat gant Doue, en ber amzer, maëz breman an treo a c'he mad gante, ma voa deut Erwan Ar Braz da veza anveet, c'houec'h leo tro rond, evel unan deuz ar gwella melinerien voa dre e labour. Erwan ha Marianna, o devoa eur verc'h... eur verc'h hanvet Mac'haridik, douz evel eun aël ker laouen ha ker koant, he bizaj ker gwen, he bleo ker melen.

Eun neubeut bale ac'hane, a welet eur vilin all, kousket, deuz adalek ar beure beteg an noz, ha deuz adalek a noz beteg ar beure, na voa ken henvel nemet deuz eur c'hraou, didoën ha dibrenest, e dor na chomme ken zerret... Pell amzer voa na glevet ken ar vilin o vont en dro.

Jakez Marigoroc'hén na laboure ken, eur bannac'h a blije d'ean kenan, na ehane da eva, nemet evit hadkrigi kerkent, e vab Pipi, a nevoa bet aliesoc'h a vannac'h gwin ardant hag a dol troad, evit a damm bara, ma teuaz da veza eul lonker deuz ar c'henta evel e dad, abalamour da ze, an dud a hanvaz anean Pichik..... Pichik a voa ru e benn... hag e fri dreist holl, an holl a dije kaz dioutan... hen ive a nije drouk deuz an holl, dre ma vijent, pe goantoc'h, pe muioc'h karet gant an dud evitan ! Drouk a nije dreist holl deuz merc'h Erwan Ar Braz, ha deuz Joseph ar Jardiner, gward-forecher en Lezvaëz, abalamour ma kleent, var a lare an dud, demezi heb dale.....

Mac'haridik a devoa triwac'hla, Joseph tri-varnugent, ha Pichik Marigoroc'hén pemp-varnugent, jalouz, digalon, diskiant ha kement voa. Eur re gofäd gwin ardant a roaz ar maro d'e dad, ha setu Pichik, e-hunan er vilin goz, deut da veza trist, ha tenvall evel eur be.

Pichik pa zave, a c'he raktal da di unan goz, a c'houvee lenn ar blandeden var bâl an dorn, an hini goz a ziskwelle d'ean ar ied hag al louzou a roe d'an dud ar iec'hed pe ar maro, ha Pichik, gant ar zonz

à c'halfe marteze n'em dizober dimeuz Joseph ar jardiner, a zelaoue e c'homzou... Goude e lakche Mac'haridik da garout anezan, ha goude e lakche Mac'haridik d'e gemer evit pried.

An hini goz a ziskwellaz c'hoaz d'ean al louzou a roe buez hir, ar re a roe chanz fall, ha Pichik a grede anei, evel ma kreder hirie penoz al laerez a vez torret, ar gwenan iac'heet dre oraëzon, ha penoz eur zaillad dour klouaret gand eur vilien ru tommet en heol a ziarc'houez laez ar zaout; Pichik a nevoa kalz a fe en komzou an hini goz-ze, dre ma wele an holl o tiredek tresek enni gant fizianz; e-pad ma vo tud var an douar, a vo dioutê unan benak izel a spered...

En kalon Pichik a dremene meur a dra. En Lezvaez, tad ha mam Joseph ar jardiner a zo evuruz, Mac'haridik a blij d'ê evel eur verc'hi Bep noz, pa vije echu ho labour, a c'hent da lakad eun tam tan, da ober eur gozeaden da vilin Lezvaëz; pa vije brao an amzer, Erwan Ar Braz ha Marianna a blije d'ê mond d'o ambroug eur pennad, Mac'haridik ha Joseph a zeue varlerc'h, en eur laret eur gir benak... Pa vijent demee e teujent o daou da velin Lezvaëz... Pa vije oajet tad Mac'haridik, Joseph a zalche ar velin... a dra zur, ar c'hoajeier a blije d'ean kenan... Mez evelse e vijent evurusoc'h.

Joseph na vije ket gwelet, evel an dud iaouank all, o tispign e arc'hant en hosteliriou; na Mac'haridik o vale an noz, evel ma weler breman eun darn... Gwelloc'h a vije gante mond da vale er prajeier, el lec'h ma kavent aër ken mad, ha fleur ken koant.

An amzer a dremene, Mac'haridik ha Joseph a glee bea unanet er penn kenta a viz du... laket a oa ober dillad neve... Er zul-se, an Aotrou Person o embannaz evit ar vech kenta...

Pichik a oa dare da goll e benn. Koulskoude, teir gwech a nevoa ber- vet deillou illio dastumet pa zeue an taol a hanter noz, ha devet trivec'h brank ivin, dastumet d'ar gwener kenta ar miz var e galon noaz... Teir gwech ive an nevoa taolet an dour illio hag al ludu ivin-ze var doën milin Lezvaez... Ar vilin a zalc'he bepred da vont en dro, an dour da ruillen, an dud da c'hoarzin... Deuz kement-se, Joseph ha Mac'haridik na c'houveont netra... na zonzont ket sellet var o lerc'h evit gwelet daoulagad Pichik o c'hedal anê evel eur blei.

Pichik a oa prest da goll e skiant. Ac'hanta, p'eo gwir an diaoul na zelaou ket e bedennou, esa raio, da genta, n'em dizober deuz Joseph, ha goude, lakad Mac'haridik da garout anean.

En amzer-ze, tad Joseph a gweaz klanv, ma renkaz e vab ober labour daou. Na zeue ken nemed eur vech an amzer da vilin Lezvaez ha pa zeue, na re nemed tremenn. Eur zulvez da noz koulskoude, an amzer fall a zalc'haz anean muioc'h eget ar c'hustum en ti Mac'haridik; e vam marfad a vije nec'het. Mont a re eta tresek ar gaër kerkent ha ma tavaz ar glao; bale a re buan, e voutou a re trouz pouner, ar c'hurun a groze, an torcho tan a lugerne en nenvo; ar c'haran a c'heuille a oa moan meurbed, troidellad a re dre vesk ar gargal, ar c'heuned, an drein, ar spern, ar gwe dero... en daou lec'h oa troc'het gant diou oaz dour bihan, mez ken bihan, eur bugel o zreuje hep poan ebet. En de-se koulskoude, an dour a zeuaz da veza ken krenv, ma n'ellaz ket tremen. Dond a reaz eta var e giz evit heuill eur c'haran all, dre lec'h ma teue gwech all ar c'hirri, karget a bri... danjeruz a oa, mez Joseph a anvee an hentchou-ze ken mad... bale a re eta buan... kana a re laouen...

Ar c'hurunou oa tavet, an avel na iude ken en bek ar gwe braz; pa glevaz eur griaden skiltrus... rei a reaz peuc'h... chom a reaz en e zao... Mez kerkent a c'heuillaz adarre ar memez karan, o sonjal marteze e oa iouc'hou eur c'hi benak, kollet er c'hoat, pe eun dra benak evelse...

Pa glevaz c'hoaz, stog ennan, diou griaden all, zeblantout a re

d'ean c'hoaz klevet unan benak o klem, sellet a re a zeou, a glei, heb gweled netra, nan netra, nemed an denvalijen... Bale a reaz c'hoaz, breman erfad a wele petra oa oc'h ober an drouz, en mesk ar gwe, eur sklerijen a zeblante sevel evit disken kerkent betek an douar... finval a re... Dont a re tresek ennan... Ma vije e vam !...

— C'houi eo a zo aze ma mam ?

Evit respont, eur c'hoarzaden spontuz a zeuaz betek ennan... eur griaden hag a lakaz Joseph da grena... Chom a reaz eno, heb galoud biken ober eur gammed ouspen, na mont pelloc'h...

Joseph na oa ket koulskoude eun den aonik, mez kleved a nevoa komz deuz al lutined, ar gannerezed noz... Eun den oc'h ober pinijen! ar zonz-se a lakaz anean livet fall. Na renkaz ket gortoz pell amzer evit gweled o tont tresek ennan eun dra benak gwen, heuzus, spontus... Eur griaden ha netra ken ! Heb sonjal penoz na oa nemed eun toullad drein o c'harz anean da goueza en eun toull mengleuz, ober a reaz eur gammed var a-dren, an douar a vankaz dindan e droad... ha netra ken pad eur finvaden ! Maro oa en fons an toull mengleuz.

Pichik Marigoroc'hen eo a nevoa graët an taol-ze, var e gein eul linsel, var e ben oa eur pen loen-kezek maro, deuz e zaoulagad a zeue eur sklerijen heuzus. Ha sethu breman ar paour kez Joseph, brevet e izili, maro en eul lec'h ma ne vo ken komz dioutan...

Pichik a lac'haz e c'houlaouen, teuleur a reaz ar penn maro en mesk an drein, evit mont adarre d'e velin heb beza gweled gant den !

Nec'het e oant en Lezvaez, o weled na zeue ket Joseph d'ar gaër an holl a c'heaz eta d'e glask, gant aon a vije bet lac'het gant eur chasseur benak... Deuz ar beure hepken e kavchont Joseph hanter varo... Koulskoude e wad a rede c'hoaz en e wazied.

En pad meur a zunvez ar maro e c'hedaz hep paouez. En Lezvaëz, an holl oa ankeniet. Ar gaoz oa et da lared penoz Joseph a oa kouezet en eun toull mengleuz... Den na zonzje en drouk deuz a beurz den ebed... Pichik Marigoroc'hen a c'halje eta kerzet zonn e benn, heb aon ebed... Ar c'hlanvour a gomze deuz traou spontus... Petra na leverer ket pa ver klanv...

Pa c'houveaz Pichik e teuche Joseph da vad, a c'heaz en eur gounnar ar vrasa, mez pegement a blijadur a reaz d'ean kleved penoz Joseph a oa dall !!! Na welche ken, da vihana, bizaj dous Mac'haridik !

Piou a anavefe breman milin Lezvaez ? Ar velinerien a zo savet, na glever ken mouez ar merc'hed o vaki gant o menaj, ar c'haon an neuz poagnet kalon an holl.

Paour kèz tud iaouank, pegen evuruz na vijec'h ket bet assemblez !! ha breman na red nemet skuill daëro !! Joseph dreist-holl a glemme.. n'eo ket abalamour d'e garg kollet !!... Mez Mac'haridik... abalamour d'an hini a gare ar muia... Karout Mac'haridik !!! Oh nan ! breman eo fin d'e evurusted... ar maro... ha pa vije e-unan, an dour a rede var e zious chod.

Tam ha tam, an nerz a zeue d'ean... sevel a ree.. ha pell pell, a jomme dirak ar prenestr hanter digor, da zelaou mouez al lapoused er c'hoajeier, an dour o redek an tu all d'ar c'hoat... ha pa zonzje penoz n'o gwelche ken, an dour a zeue var e zaoulagad... Mac'haridik a zeue evit diboagna e galon glac'haret... an esperanz a nevoa e c'huitaet...

Eur zolvez deuz an noz, an Aotrou Person a zeuaz evid gweled Joseph... Mac'haridik azeet ouz taol, a laraz d'ean evelhen : « Aotrou Person, gweled a red penoz Joseph a zo breman iac'h mad, pe eo gwir a meump kollet kalz a amzer, disul genta e c'helfed embann ac'hanomp evid an eil hag an derved-gwech... »

An Aotrou person a vousec'hoarzaz... Tud Mac'haridik a jommaz mantret... Tad ha mam Joseph a zelle an eil ouz egiie... Joseph e-unan a zeuaz da veza livet fall...

« An traou a zo prest, pa gerfet a vo ze, hag evel ma kerfet... »
Joseph a zavaz en eur astenn e zaou zorn, hag a laraz : « Na c'houllan ken !!! na c'houllan ken !!! kement-se ! »

Mac'haridik a stardaz e zaou zorn etre he re : « Neuze eta na garez ken ac'hanon ? Joseph ! »

« Leret d'ê, Aotrou Person, a laraz o zud en eur vouez, penoz na ve ket dimeet tud dall ! Kement-se zo diotajou ! »

« Diotajou binniget gant Doue ! a laraz dioustadik ar belek. »

Mac'haridik a reaz eur c'hoarzaden, o klevet an Aotrou Person o komz evelse. He zud na gredchont ken enebi diouthi... Mac'haridik e devoa karet Joseph enpad ma oa evuruz, ha breman, var digare ma nevoa bet chanz fall, er dilezfe... Nan nan ! E vuez oa e hini... awalc'h a draou o devoa evit beva o daou evuruz... ha pa vije maro he zad, e hunan a c'houveche kas ar velin en dro.

D'ar merc'her varlerc'h, en kostez Lezvaez, na weled nemed tud gwisket kaër, seder ha joaüs, an holl a c'heuille daou zen iaouank flam betek an iliz. Ar re-man a oa Joseph ha Mac'haridik.

Ha Pichik Marigoroc'hen?... Den na glevet ken komz diouthan, pemzek deiz oa a veve evel eun hermit er c'hoajeier.

En pad ma oa ar belek o vinniga hag oc'h unani evit biken Joseph ha Mac'haridik, an iliz a grenaz gant trouz eun tenn benak eno enor..

Achu an oferen, an holl a welaz dirag ho daoulagad, Pichik Marigoroc'hen, ar gwad o ruillen deuz e benn digoret... Goude esa lac'ha Joseph ha Mac'haridik, e oa en em lac'het e-unan.

Plestin-an-Treaz.

E. AN HENORET.

Pell a Vreih-Izel !

CWERZ AR DON ER GWERZ IVERSONEK : FAR FROM THE OLD FOLKS AT HOME)

I

Pell a Vreih-Izel mem Bro karet
Pell ag hi nean,
Me c'halon keh e zou glac'haret
Ha trist eùe m'inean.
Ker em es bale ha ridek Bro
Dre holl er bed,
Peah erbet n'hellan kavet en dro
Pell a Vreih-Izel karet !

DISKAN

Ne vern emen e tremenan
M'hum gav divroet ;
O men Doue na tristet e viuan
Pell a Vreih-Izel karet.

II

Bet oen bet e Pariz hag e Roan,
Ha pelloh hoah ;
Gwelet 'mes er Vroieu er geran
Hag e zou bet biskoah ;

Er Franz, er Spagn hag en Itali
'Mez baleet,
Mez ataù droug er Vro me heli
Pell a Vreiz-Izel karet !

III

E Breih-Izel em es mam ha brer
Doh me hortoz
E Breih-Izel e men dous dister,
E houilet d'ein de ha noz.
E Breih-Izel en un douar santel
Me zad kousket,
Ha me eùe vinnan ket merùel
Pell a Vreih-Izel karet !!

DISKAN DEUEAN

Pad en amzer ma tremenein
Mi 'vou divroet ;
O men Doue, penoz hoah e viuein
Pell a Vreih-Izel karet.

EFFLAM KOED SKAU.

AN NEVEZ AMZER

O vont da bourmen d'ar c'hoajou
Meuz klevet an evnedigou
O laret d'in dre o c'han sklaer
E ma tost an nevez amzer.

Ar c'haz en halek zo gwelet,
Tremenet eo ar goanv kaled
Boutonou zo er plant, er gwez
Esper a zo da gaout frouez.

Ar wazik-dour hiboud bravoc'h
An ezen 'santer kalz skanvoc'h
Santout a rer vo hep dale
Eun adsavedigez neve.

Esperomp 'ta ma mignoned
Doue 'neuz ket hon dilezet

An nevez amzer a dosta
Hag a rei buez da beb tra.

Ar iaouankiz a gano drant,
Ar re goz muioc'h dizeblant
Mez o c'halon holl sederet
Hag o izili diskornet.

Ar bokedou 'zavo o fenn
Bet pell goenvet gant ienien
Ar ieod ar c'hazo er parkou
Sec'h e vo ar gwinojennou.

Buez an Den, buez ar bed
'Zo steuet 'vel-se hed-da-hed
Var lerc'h eun nozvez a c'hlaou kri
Heol ar mintin a rei d'emp spi.

A.-M. R.

Ar Goulmik hag ar Marmouz

Eur goulmik wen, eun deiz, oa kluchet war eur brank,
'Uz d'eul lenn islounkuz leun a bri hag a fank.
Eur marmouz o tremen en em lak e kounnar
« Re lorc'hus out, koulmik, re vraz eo da c'hened ;
Dustu ouz he gwelet, ha d'ezhi a lavar :
Dismeganz a daolez war gouen ar marmouzed,
En noz gant da gleman me n'hellan mui kousket.
Gouestlet a meuz hirio d'ober brezel bepred
D'id ha d'az c'hoarezed ; d'az kwelet dirazon
Ken koant ha ken seder, a ra poan d'am c'halon.
Tec'h kuit ; pe me bigno er wezen lec'h m'emout,
Da droc'ha 'vit da goll ar brank zo dindanoud. »
Ar goulmik ne flach ket ; ar marmouz gwez raktal
O c'hrosmolat, er wezen a bign gant eur vouc'hal.
An taoliou a gouez puill, hag ar brankik a bleg ;
Neuze 'vit he c'hourdrouz ar goulm 'zigor he beg :
— « Ehan, paour kez marmouz, koll a rez da amzer,
War an avel bremaik me a nijo gant herr ;
Ar brank skoez varnan ac'hanout a zouten,
Mar troc'hez anezan e ruilli el lagenn.
Kred ac'hanon, marmouz, disken ha lesk ar brank
Anez 'varvi el lenn beuzet e deun ar fank. »
— « Diotachou, va c'houlm ! 'lar kerkent ar marmouz
Beteg mervel d'in-me n'ehani d'ober trouz,
Gwelomp 'ta piou diouzomp a gollo e vuez.
D'az kwelet kreiz ar fank, na pebez levenez ! »
An diot a gomz c'hoaz pa dor ar brank a grenn,
Raktal e deun ar fank eo sklapet war e benn.
Ar goulm pa strak ar brank, digor e diouaskel,
Digabestr evel kent a zav war an avel....

Na tud kriz 'vel ar marmouz a weler en hon Breiz,
Hag a fell d'ezo mouga he lez kaër hag he Feiz ;
Siwaz d'ezo, en aner. e skoont gwall daoliou,
Feiz ha lez ar Vretoned a gavo askeliou.
Hi eo hor gwella digouez, gwella tenzor ar Vro
E Breiz e vezint meulet ; bepred hint a vevo !

AR VENAER.

Klemmou ar Breizad divroet

I

Bean zo daou vloaz pe vardro
Boue meuz kuitet Breiz-Izel
Moa dilezet ma Bro
Vit mont d'ar c'haëriou pell.

II

O sonjal gounid arc'hant
Ha kavet evurusted
Na meuz 'med nec'hamant
Ha kalz a boan spered.

III

Pa oan-me o kimiadi
Deuz ma bro Breiz-Izel
A ren ma fae varnei
Neur laret a vouez uhel :

IV

« Kenavo d'id Breiz-Izel
Gant da lez brezonek
En ker m'o eur garg uhel
Me gomzo ar gallek. »

V

Pa oan en ti ma zad
Me zebre bara gwen ;
Ha breman, o kalonad
Me zebr bara anken.

Kermaria-Sulard

VI

Ebarz em bro Breiz-Izel
D'ar zul, ha d'ar goueliou
Evel eun den santel
Heuillenan ofisou.

VII

'Barz en ker-veur Bro-C'hall
Ma feiz meuz dilezet
Hag e-touez an dud fall
Me zo en em gollet.

VIII

Kollet a meuz ma enor
Kollet meuz ma brud vad
Kollet ar gwella tenzor
Na me meuz kalonad.


IX

O na keun meuz d'am bro
O vean hi dilezet
Pegoulz c'hoaz a deuio
An de da vont d'he gwelet ?

X

Distro ma breur Breizad
Ia, distro c'hoaz d'az pro,
Breiz-Izel zo eur vam vad
Gant joa da resevo !

L. CHARRAN.



E O S T I K H A T U R Z U N E L

*D'am Mignon ker Theophite Gui'llou,
ha da Vari ar Gall, e bried.*

Eun estik hag eun durzunel,
Ganet o daou e Breiz-Izel,
An eil ouz eben veve pell.

Pell oent an eil ouz egile,
Piou a grede vijent eun de
Skoulmet gant liam ar garante ?

D'ar mare vleun ar boked-roz
Hag ar bruk ru e-krap ar roz,
D'ar mare koue puill ar gliz-noz ;

D'ar mare 'kan an evn lirzin
A-uz d'al liorz er bod ivin,
Beteg zer-noz deuz ar mintin ;

D'ar c'houlz-se, deuz kreiz ar
|c'hoajou
An tremener glev hirvoudou :
Mouez an estik mesk an deliou.

An estik kez gant droug-hirnez
A huanad atao hep paouez
Ken en devo kavet eur barez.

Eun deiz, an heol var ar ieod glaz,
Lagad an estik a baraz
Var eun evnik n'anave c'hoaz,

Eun durzunel, he unanik,
A richane dousik, flourik ;
Koanta parez 'vit eun estik !

E galon baour a lamp 'n e greiz
Ha 'n em lak d'hi c'harout e-leiz,
Ha d'ei breman nijo bemdeiz.

Dare hi nij gant karante
Da gana o daou, skeud ar gwe,
Dindan lagad 'n Aotrou Doue.

D'an estik ha d'an durzunel
Kalz evnigou var an avel
Da domma dindan o eskél.

Varnoc'h an hevelep bennoz,
Tudou neve, sed ma mennoz
Gant kurunen ar baradoz.

St-Nikolaz-ar-Pellem 19 : 2 : 1906.

EVNIK ARVOR.

H E G I N A N E ⁽¹⁾

Eur miz araok "al lard" an Heginanerien a ia en dro da gana an "Heginane" pe Kanaouen ar Marlarje. Sier ve gantê war o chouk da zerri ebarz kig pe ed, ar pezh a ve en bolonte an dud vad rei d'ê.

Sed a-ze a dra-zur eur c'hiz koz-kozh en Breiz-Izel. An Heginanerien a zo vel eur sort rummad barzed baleerien. Eur vicher eo, da goulz al lard, hag eur vicher vad, m'hen lar d'ac'h. Digemer ve great d'ar gannerien, rag ar Vretoned a zalc'h d'ho gizioù koz. Anavezet am euz eun den euz ma bro hag a lac'he eur porc'hel lard vit an Heginanerien !

Banac'hou a dapont awechou ive ; na n'euz drouk, ar c'hontrol : gwell pe well a loskeont war ar c'han hag ar pozou a zeu distakoc'h.

Danve Kanaouen ar Marlarje a zo henvel awalc'h dre holl. Koulskoude a zo tammigou chenchamant hervez ar c'hornik-douar e ver ebarz, hag an holl heginanerien a oar ze ervad. Hini ar Barzaz-Breiz a zo bet kutulliet e Spezet gant Hersart a Gervaker. An hini zo aman war lerc'h, zo bet kanet d'in gant Loeiz Ar Floc'h, gwerzer "Ar Bobl" e St-Nikolaz. Ar pozou dishenvel ouz ar re-all a zo, hervez ma c'haner, re bro Gronwel. Me gred kentoc'h ec'h int pozou an "Heginane noz," rag koueet ve-an devalijen war an douar pa zigoue Heginanerien St-Nikolaz e bro ar "Fiselled."

EWNIK ARVOR.

(1) *Heginane* na ziniñ ket "Au gui l'an neuf," evel m'en deuz dizoloet eur penn gall diot benag. *Heginan* a zo eur gir brezonek koz hag a ziniñ *Dérou-mad*. An doare reiz a zo eta : *Heginan ! Hé !*

In nomne Patris et Fili
Doue da vinnigo an ti.

Heginane, Heginane.

Da vinniga 'n ti hag ar c'hraou
Hag an holl ed 'barz ar parkou,

Heg...

Me a zalud tud an ti-ma
Ar mestr zaludan da genta

Heg...

*Ma zoc'h kontant me a gano
Ha mar n'oc'h ket me a davo.*

Heg...

Ar mestr zaludan da genta
Ha tud e di war dro gantan,

Heg...

*Ni zo trivec'h en eur vanden
Loeis Ar Floc'h eo ar c'habiten*

Heg...

Marlarje a zo chomet klan
Na c'hell na dibri nag evan

Heg...

Eiz de tremenet aboue dec'h
N'an euz bet nemed bara zec'h.

Heg...

Breman 'man deit 'n heginanerien
Da glask kik evit ober souben.

Heg...

Savet alese c'houi matez
Da dapout he boutou d'ho mestrez.

Heg...

'Maint aze war al lec'h
Ha bouchenet aboue dec'h

Heg...

*Me wel ar goulou en eun ti
Na ouian ket petra ziniñ*

Heg...

Me wel ar vreg o vont d'ar griniel
Gand hi flaten hag hi c'hontel

Heg...

Troc'het pellik demeurez ho torn
Gand aon da droc'han an askorn

Heg...

Rag an askorn pa ve troc'het
Na dal ket ar gwad a zo riwet.

Heg...

Heman a zo eur pez braz
Na vo ket lakaet 'barz ar zac'h

Heg...

Heman vo lakaet var bek ar berchen
'Vit ober enor d'e berc'hen

Heg...

Heman vo lakaet war bek ar vaz
D'ober enor d'an ti braz.

Heg...

Henez zo eun ti braz hag uhel
Hag a ve gwelet euz a-bell

Hig...

C'hoaz vije gwelet a-belloc'h bro
Paneved d'ar c'hoat zo tro-war-dro.

Heg...

Heman zo eun ti ozac'h mad,
Med e vreg hen tal'ervad.

Heg...

Koulz er ger evel er marc'had.

Heg...

Me a zouet d'ec'h gand kalz a joa.
Tri borc'hel lard a-benn ar bloa.

Heg...

Tri borc'hel lard hag eun ospenn
Ha parkajou mad gwiniz gwenn.

Heg...

'Man 'n avel diwar ar mor
Ha n'eo ket brao bout toull an nor

Hig...

'Man 'n avel diwar Sant-Trefin
Toull an nor-ma na bada din.

Heg...

'Man an avel diwar ar stank
Me garfe brao bout tal an tan.

Heg...

Staget ho kaz, staget ho ki
'C'hei ar ganerien barz an ti.

Heg...

— Laret hu d'in, heginanerien
Pelec'h 'man chomet ho sonerien ?

Heg...

O tond d'an traon gand ar c'hoajou
A oa krevet ar zac'h biniou.

Heg...

O saillat dreist ar c'hleuz er park
A oa diindrastet ma bombard.

Heg...

O tremenn chausse ar velin
A oa dindaone! ma zaboulin.

Heg...

Efflam Kerzenan ha Mac'haridik

(DANEVELL NEVEZ)

Gant Efflam An HENORET (Plestin-an-Traez).

Kendalc'h (10)

— XI —

Ar zonzj deuz e glenved, a oa bet en danjer a varo, a lake Erwan de Montré da zonzjal en e verc'h, en Mac'haridik, en e amzer da zond; dirakhi koulskoude na vije bepred zeder, e galon rannet gand an dristidigez.

Tremen a ra a! loden vraz deuz e amzer en toul e dor, var e dabore... zellet a ra bepred trezek Zant Nikolaz. « Doue, emean, na neuz ket ma dilezet beteg vremen! Mez pa vin maro, petra a deuo da veza Mac'haridik?... Goud a ran mad eo eur botrez vad ha kourajus; na anave ket, koulskoude, ar pechou a stigner dindan treid ar iaouankiz, ar gened, ar furnez?

Eur beurevez, an dra ma oa en komansamant miz Even, an heol a oa tom, an amzer a oa brao, Mac'haridik, lac'het kazi gand al labour a renke ober aboue ma oa klanv he zad, a c'heaz var bord rivier Melin Zant-Nikolaz. Na zalez ket da chom kousket... Paour kaez Mac'haridik! marc'had a oa zavet pell arog an de evid labourat.

En he gichen he zad, koz e benn gand ar boan spered, a zonzje evelhen : « Doue a vinigo bepred eur bugel ker fur, eur bugel a zo bet evidon me evel eur vam evit he bugale... O! ia, pa gomprenan enni a zonzj d'in hen gwelet iaouank ha fleb meurbed, a unan ganin tresek Breiz-Izel, dre ar c'hoajou, prest evel don da vervel en henchou fall.

« C'houi Aotrou Doue, pehini a poa roet nerz d'ei da heuil ac'hanon heb en em glem, breman ive, pa na vin me ken, zoutennet ha diwallet anei. »

Erwan a nevoa c'hoaz eur mignon en Plufur; hennez ive a nevoa renket kuitat e vro eun tam var e lerc'h, en amzer ze evel beb blâ, a teuz da welet Mac'haridik hag he zad.

Arog laret kenavo d'e, greg hennez a c'heaz gand Mac'haridik a goztez, hag a laraz d'ei : « Mac'haridik, gwelet a ran ervad penoz a zo fin awalac'h d'az tad. Da vihanan, neuze, a c'halli dont da Blufur; ar garantez a zo bet a viskoaz etre da dad ha ma fried a zigor d'id frank ma dor. » Mac'haridik a 'n em lakaz da ouela...

Adalek an de ze, e-tal ar stang, ha dreist-holl en ti forn, na glever ken kozeal nemed deuz estranjourien Zant-Nikolaz a dlee retorn d'o Bro.

Mari-Louiz Melin Zant-Nikolaz, o tistrei deuz an ti forn, a c'heaz var eon tresek ar Gerveur. Pa 'n em gavaz en ti, Mac'haridik, azeet var ar bank kloz, he fenn ganthi etre he daouarn, na glevaz ket Mari-Louiz o tont.

— Brema a c'het da guitaat ac'hanomp neuze? var ar pez meuz klevet en ti forn.

— Red eo d'eomp, eme Mac'haridik.

— Mont kuit... dilezel ac'hanomp!... koulskoude, na ma gwaz na me na zilezfomp biken ac'hanoc'h... bepred e tiwalfomp ac'hanoc'h a-eneb d'an dud traitour... Rag goud a ran penoz en kastel an Aotrou Keriell a zo unan bennag hag a garfe kaout ho kened!... Zonzj ho peuz deuz an de ma devoa laket drailla d'ec'h ho pokejou... Zonzj ho peuz ive deuz ar bokejou a zigasaz d'ec'h en o flas merc'hed iaouank Tremel; ha pa oa klanv ho tad, zonzj ho peuz deuz an dud ze a deue deuz ar bourk ha deuz dre-holl d'e welet, d'e gonzoli?... En pelec'h a vefet muioc'h karet eget en Tremel?... abalamour da betra a kuitait ac'hanomp?

— Karout a rejen awallac'h chom dre aman ; Tremel eo ar vro a garan ar muia var lerc'h ma hini, ha koulskoude, red mad eo d'in en kuitaat... Ha na peuz ket gwelet peger trist ha peger kasti eo ma zad eur pennad zo?... zé eo a jen ac'hanon dreist-holl, Mari-Louiz... Gwelet a ran penoz, ma chom dre aman na vevo ken a bell... al labour...

— Ma neuz ken nemed al labour oc'h ober poan d'ean, losket ané war ma c'hont ; me, adalek ma bugaleaj, a meuz disket labourat, ha mar keret, adalek an de a hirie, a zikouro ac'hanoc'h...

« Adalek an de a hirie, neuze, na welin ken ac'hanoc'h dre aze?... Petra a larin me da Janed vihan, pa c'houlennno ac'hanoc'h !... Chomet ganimp eta ; mar gouvefec'h pegement a blijadur a refec'h d'eomp !... ni a roio d'ec'h peurz er pez a meump. »

Tad Mac'haridik, dre ma wele ervad penoz a fallee bemde, a deue da vea trist, muioc'h mui. Mac'haridik, petra a deuo da vea?... ha koulskoude, en despet d'e boan spered, en despet d'ar pez a c'hlac'hare d'ean e galon, dirakhi a vije bepred zeder.

Azeet en toul e dor, dirakan Chapel Zant-Nikolaz gand he zour moan, he gog du, melget gand ar gloeier, Erwan a dremene eun heur hanter o zonzal en de ma roje Doue d'ean ar c'hras da vont, kent mervel, da zaoulina dirag ar groaz vihan ouz troad pehini a kousk e vreg muia karet, mam Mac'haridik...

Ha neuze e benn a gouee entre e zaou dorn, an daerou a zirede deuz e zaou lagad... Petra a deuo da vea Mac'haridik pa na vin me ken ? Goud a ran penoz Mac'haridik a zo kab da zalc'hen penn da tentasionou ar bed !... Koulskoude pa zonzjer pegen fall eo an dud en devez a hirie !...

Ha ma tilam diganemp ar pez a meump, a laraz adarre Mari-Louiz, ha c'hei a-unan gant Yvonaik ar baourez da skei var dor labourerien Tremel, evit goulenn en han Doue eun dra bennag evidoc'h.

Mari-Louiz an daerou en he daoulagad, na zistage ket diwar Mac'haridik :

— Breman, emei, a zeu da zonzj d'in... Ni, n'omp nemed labourerien, n'ouzomp na lenn na skriva...

— Mari-Louiz, Mari-Louiz ! a laraz Mac'haridik en eur starda he dorn var he c'halon, na zelaouet ket ar pez a lavar an dud, lezet ané da laret ar seurt ar garfont !... Mar geuz unan bennag hag a garan a greiz ma c'halon eo c'houi Mari... ia, ha pa ne vo ken ma zad en buez, me a zistroio adarre da Vreiz-Izel...

Mar greaz kement-se kalz a zisplijadur da Vari-Louiz Melin Zant-Nikolaz ; Yvonaik ar baourez a hirvoudaz ive dourek pa her klevaz.

Penoz laret d'ec'h an displijadur a c'houzanvaz Eflam a Gerzenan, pa laraz d'ean Yvona, a c'he estranjourien Zant-Nikolaz d'ho bro Tremel Zant-Nikolaz heb Mac'haridik ! An dristidigez ar Maro !

An dra-ze a zigassaz da zonzj d'ean deuz e gouversion... Gwelet a re an techou fall gant ho mantel du, o tont trezek ennan... evit mouga en e galon ar fe... ar c'hoant da vea kristen mad...

Dont a reaz da vea trist ha tenvall e benn, evel diagent, na gozee koulz laret deuz den, ha Soazik a gave gwall drol, rag Eflam na lare ken neutra dezhi. Pellaat a re muioc'h mui deuz an dud, hag an tiezmad a zaremprede ; pa deue an noz, henvel ouz eun den poagnet meurbed, ja welet anean, pleget e benn o vale dre ar jardin, ar parkeier... An Itron a Gerzenan pa devoa gwelet meur a veach, penoz Eflam a nije bepred e zaoulagad troet tresek Zant-Nikolaz... Na oa ket evid goud abalamour da betra a vije deut he mab da vea ken trist !

Eun devez an Itron a Gerzenan a c'halvaz he mab hag a laraz d'ean :

— Gwelet a ran penoz ec'h out deut da vea tristoc'h eget biskoaz ; petra a zo kirriek da ze?... Marteze ec'h out skuiz en Tremel?... Ar jardinou o deuz eom da vea engalet... Pe marteze a teuz c'hoant mont da Bariz?... Lavar d'in eta ar penn kaoz da anken.

Eflam a Gerzenan na rannaz ket eur gir ; hi ja a reaz hebken e benn.

— O ! ma mab, a laraz adarre an Itron Kerzenan, mar gouvefec' pegement a boan a ra d'in gwelet ac'hanout ker trist ha ker dilavar !... Lavar d'in... lavar d'in ar pez a ra kement-se a boan d'id, evit ma c'hallin lakat ac'hanout evuruz mar geo posubl !... Na lâr neutra !... O ! ma Doue, pell diouin an evurusted, ar blijadur .. rag ma mab a zo bepred ar me-mez hini... O ! ma Doue... Petra a teuz eta ma mab ? Lavar d'in eta... en hano da dad.

Efflam Kerzenan a zavaz e zaoulagad tresek e vam; an daerou a rede var e zioujod, hag a laraz:

— En kichen Zant-Nikolaz a zo eur plac'h iaouank... eun ael mar geuz... hounez eo a deuz disket d'in karet Doue, hounez eo a deuz digaset ho mab var an hent mad... ha breman a klevan laret penoz ac'h a da gwitat Tremel evit mont pell pell ac'han... Me garfe... ha kontant oc'h-hu a teufe Mac'haridik da vea ho pugel, ho merc'h?

— O ia ma mab, ! eun dra bennag a teuz c'hoaz da c'houlén diganin !.. Evit lakat ac'hanout evuruz me roio evidoud ma buez, ma vez red.

— O ! ma mam, eme Efflam, trugare d'ec'h. Pegement a blijadur na ra ket d'in ar gomz ze ! Ma meuz graet kalz a zisplijadur d'ec'h en amzer dremenet, en amzer da zont...

— Ar zonz da lakat ac'hanout da vea evuruz a laka ac'hanon da ankouad ma displijadur dremenet ! O ia, joaiuz braz a c'hon o velet a teuz kavet, evel ma lavare da dad ken ma varve, eur plac'h iaouank vad, fur ha karantezuz.

— En de a hirie, o ! ma Doue. lezet eur paour kez plac'h da vond en peuc'h divar an tam douar ma. P'eo gwir, ma mab a zo dizroet var an hent mad !

— Nan, nan ! ma mam, c'houi vevo evit karout Mac'haridik evel ma eo karet gant pevien Tremel ; Mac'haridik n'eo ket pinvidik, petra eo ar madou, an enoriou ! Eur tam poult pe ludu Mac'haridik a zo eur plac'h deuz ar re wella : goulennet digant Mari Louiz Melin Zant-Nikolaz, pe digant Yvonaik ar baourez, ar reze hebken a oar pegen trugarezuz, pegen mad eo evid ar bevien.

— N'ho deuz netra a leverer dre aze, geo diou vrec'h e deuz, ha gand e gourach, hag ar gonfianz a lak en Doue, a vevfomp !

— C'houi ma mam muia karet, gant pehini a meuz disket penoz an den var an tam douar man, na neuz d'ezan nemed eun neubeud a dra, c'houi a oar penoz n'eo ket ar binvidigez a lak an den da vea evuruz, c'hoant a peuz da gaout Mac'haridik evit ho merc'h... mez ma zonton... petra a lavaro ma zonton ?.. Penoz dont a benn da gontanti anezan.

— Red eo lavar d'ean penoz an demei ze a reio da holl evuruztet, hag holl joa da vam, er c'heit-ze me a bedo Doue evit ma teuo da sklerijenna anezan. Kerz eta ma mab, red en bolonte Doue. *(Da heuil.)*

AR WAZIK-DOUR

Me anavez eur wazik-dour,
En eur dremen 'gan flourik-flour,
Dindan an drez hag ar broustou
Niveruz braz war e riblou.

E eienennik a gemer
E-barz en eur feunteun dister
Paket brao tre en eur c'hustod,
Ha klozet brao dindan eur bod.

A-hed an deiz, war ar bodik,
Ar vilfid pe ar penglaouik,
A vesk o c'hanaouennou lirin
Gant bourbouill ar wazik mibin.

Dour ar wazik n'em goll goude,
En eur c'hleuz don evel eur be ;
Ne glever mui e c'han laouen,
Mez n'eo ket kollet da viken !

Tarza 'ra e korn eur foennek,
E-touez an drez hag an halek ;
Siouaz e sklerder neuz kollet,
Gant loustoni ez eo saotret.

Lod euz e dour, er c'houer a gouez,
Lod-all a gas freskadurez

D'ar ieoten ha d'ar bokedou
Evit kaerat d'ezo o liou.

An teill en do ganthi kaset
War o griziu neuz he daolet,
Hag an dour deut a nevez skler
A gemer prest hent ar c'houer.

En em gemesk a ra goude
Gant an dour 'gouez a bep koste,
Hag e kevred, heb diskuiza,
Ruillont d'an traon 'n eur vourbouilla.

Hag evel-se 'dreuz ar prajou,
Dre kalzik a gammigellou,
Ar ster en em dol war e benn
Er mor, islonket da viken !

Var da riblou, gwazik karet,
Meur a wech ez oun bet chommet,
Da hunvreal pell euz an drouz,
Chalmet gant da vouezik ken douz.

Pa vo trubuillet va spered,
Pe va c'halon gwall glac'haret,
Me zeuio c'hoaz war da riblou
Evit teneraat va foaniou.

POTR AR C'HAP.

An Aluzen hag ar paour-keaz koz

Rebech d'ar paour e zienez
Zo digerri dor d'ar gernez.

Eun devez, pell zo abaoe, eun denik koz, gwisket gant truillou ha daoubleget dindan ar bec'h deuz an oad ha deuz an dienez, a zeuaz da genver dor eur vaouez pinvidik, da c'houlén an aluzen.

Houma na reaz van o klevet e glemmou.

— Tam anduillen koz, a lavaraz, mont a rafoc'h gant hoc'h hent ! Ama ne ve ket roet an aluzen da feneanted evel d'hoc'h-hu !

Ar paour-keaz a dec'haz kuit, an anken en e galon.

—o—

Demdost oa eun tiegez paour. Ar vreg divar dreujou he dor, he doa klevet komzou iud he amezegz. Truez a gemeraz deuz ar paour-keaz klasker.

— Deuit ama, emezhi, deuit en ti.

Hag e roaz d'ezan leaz da eva ha bara da zibri, ar pez a garfe.

En eur vont kuit, ar paour-keaz koz a zavaz e zaou-zorn var benn ar vreg hen doa e zigemeret ken mad.

— Kristenez karantezuz, a lavaraz, varc'hoaz epad an deiz, c'houi gendalc'ho da ober al labour kenta a rafoc'h goude ma vezoc'h savet.

Ar vaouez n'he daolaz kont ebed euz ar c'homzou-ze. Pa oa deuet an noz ez eaz d'he gwele. Kousket a reaz c'houek, evel unan a zo dizamm hag eon e gonstianz.

—o—

An devez varlec'h, en eur zevel, e teuaz c'hoant d'ezhi da vuzula eun tammik lian gwen he doa prenet evid ober eur gorneten da lakaat d'ar zuliou kaër.

Mez, Gwerc'hez Vari ! Kaer he doa muzula ha muzula, al lian gwen na zimine begad. Hag a-benn an noz, an tiez paour oa leun kouch a lian hag a dalveze d'an neubeuta eur skoed ar oalen.

—o—

N'oa ket pell, oa anavezet dre gear ar baëamant roet gant ar paotr koz evid e lein. Neuze, ar vaouez pinvidik he doa gwalgaset anean, a zavaz keuz ganthi.

— Ho ! mar teufe d'ezan dond en dro, a zonje, me rafe zur d'ezan, an taol-ma, eun digemer gwelloc'h c'hoaz eget va amezegz.

Kerkent ha ma doa zonjet, edo ar paour-keaz e-tal he dor.

— Tadik koz, emezhi, deuet en ti. Hirio, e ma fest an oc'h ganeomp, deuit-ta. Me zo vont da frita d'oc'h gwadegennoù ha c'houi velo ! Neuz ket bet an dra-ze c'hoaz en ho stann. Epad nao miz d'an neubeuta, c'houi lippo ho mounou divarnho, tadik koz.

Ar paour-keaz koz a ieaz en ti. Dibri hag eva a reaz, egiz na oa gwelet biskoaz. Goude e astennaz e zorn var benn ar vreg.

— Maouez, emezan, c'houi a rei epad an deiz varc'hoaz, al labour a rafet da genta en eur zevel.

— Aze eo, eme ar vaouez, foug ennhi. Tridal a reaz gant he joa.

Kent evid mont da gousket e lakeaz a zindan he fleuek, eur ial-c'had aour.

— Varc'hoaz, en eur zevel me a gounto ar re-ze, a zonje, hag am bezo aour da brena ha pa ve maner Kerian ; hag am bezo peadra da gaout plac'hed ha mevelien ar pez a garin.

Ne gouskaz banne diouz an noz. An deiz a deuaz, ha kerkent e savaz. Dija en he dorn he ialc'had aour, pa zilammaz eur c'houenen deuz an dillad wele ouz he zal. Ar c'houenen a groge mad. Hag ar vaouez da skrabat evit he c'has kuit.

Neuze; chanz Doue, ec'h en em gavaz eur c'hoari all. Ne oa mui evit eüna he brec'h. Kaer he doa, e skrabe hag e skrabe atao. An noz a deuaz, hag ar vaouez-keaz c'hoaz a skrabe. Var he fenn ar c'hoen a winte... A-benn ar fin e savaz mez ganthi hag e tec'haz kuit. Abaoue n'eo bet gwelet neb-lec'h.

DOPH AN TI-ALL.

Leorlennadur

Itron-Varia Lourd ha Bernadett, gant an Aotrou **MADEC**, Person Treflevenez dre Landerne. Priz : 4 real, gant eur golo kartoun, poltrejou kaër e leiz, ha 322 pajen.

Sethu ama eur leor brezonek deuz ar c'haërra great ha renevezet gant eur person kalounek a Leon. Kemend den a zo bet oc'h ober pelerinach Lourd ne c'hell mankout da gaout al leor-ma en e di. Ennan e kavo dispaket en eun doare sklear ha dudius da lenn histor Lourd, histor ar burzudou great eno gant ar Werc'hez Vari dre eur plac'hik dister, histor ar Vretoned bet pareet eno, hag ouspenn beb sort kelenadurez euz an talvoudusa.

Nan, n'anavezan ket eul leor ken marc'had mad hag heman, hag a vije gwelloc'h evitan da lenn en tiegezou kristen, kerkoulz ha da rei da briz d'ar vugale er skoliou lipr.

Hon gourc'hemenou d'an oberour, evid ar vleuen vrezounek en deuz staget var gurunen hon mam-vro Breiz-Izel.

Méodies bretonnes, dastumaden soniou brezonek giz ar bobl, kutuillet var ar meaz gant an Aotrone **GUILLEM**, belek, ha **Loeiz HERRIEU**, barz, moulet hag embannet e Kemper, ti David, muziker, 16, ru ar Park. en gwerz en ti al leorerien holl euz hor bro. E briz a zo : 8 real.

An dastumaden-ma a ra eul leorik koant a 50 pajen, ennan nao son varnugent diembann, an ton merket, ha bet kavet er pevar C'hanton.

Kemend a oar eun tammik muzik bennag, ha kemend a gar toniou e vro, a reio mad kaout en e bres-leoriou an orzennad *Méodies Bretonnes* roet hirio da Vreiz gant labour ha devouamant daou Vreizad gwirion.

Sermoniou an Aotrou Quere. — An Aotrou Quere, persoun koz Kastellin hen deuz lezet kalz sermoniou brezonek. Lod a zo skrivet gantan penn-da-benn.

Pell zo e c'houlennet ho c'has da voulla. Rag ouspenn ma'zeo sermoniou an Aotrou Quere troet kaer, int ive displeget e brezonek dispar. Pec'hed e oa lezel eur seurt traou da vont da goll.

Pelloc'h 'zo sonjet ho c'has da voulla. Beza e rafent daou leor in 18-Jezus hag ho d'evo pep hini, deuz pevar da bemp kant eneben.

Hag e kasomp d'eoc'h kemennadurez evit ma c'helfoc'h, ma ve ho faltazi, en em gemeret abred evit kaout al leoriou-ze.

Kerkoulz, ma ne ve, da neubeuta, pevar c'hant o c'houlenn dustu sermoniou an Aotrou, ne vo ket gallet ho moulla. Gant eun amzer amjest evel a zo, ar zamm a ve re bounner.

Ar re a garo digas ho han d'an Aotrou Corcuff, leorier e Kastellin, ho d'evo an daou leor evit dek real a pez.

Ar rollou a vo klozet d'an 10 a viz maë.

Moullerez dre dan AR GWAZIOU HA JAFFRENOU e Keraez (Penn ar Bed)

Le Gérant : F. JAFFRENOU.

